

KANTIK SANT Divy

DISKAN

8N2-1-041
Dirinon

*O Patron karet Sant Divy
Ni ho ped aman gand dudi.
Selaout mad hor pedennou
Grit deom ganeoh mond d'an Nenvou.*

1

Ho mamm, Divy, eo Santez Non,
Hor Patronez hag hon Intron.
Pebez enor d'hor parrez-ni
Kaout d'he dioual Non ha Divy.

2

Pell amzer-zo hon Tadou-koz
E Dirinon, war lein ar roz,
Eun iliz gaer o-deus savet
Da enori ho mamm garet.

3

Tostik d'ho mamm, e Lannuzel,
C'hwi o-peus ive eur chapel,
El-leh ma roit da bep-hini
Grasou nerzuz, o Sant Divy.

4

Skoliet oh bet gand Sant Iltud,
Kelenner dreist, santel e vrud,
Beleg, eskob oh bet goude,
Abostol braz Breiz ha Kembre. (1)

5

Lakit e-kenver pep bugel
Eur vamm gristen 'vid e zevel,
Ha grit ma chomo en hor Breiz,
Divrall ha krenv, bepred, hor feiz.

6

E Dirinon, c'hwi zo meulet,
C'hwi' zo doujet, c'hwi' zo karet.
En ho chapel, Dirinoniz
Ho ped kenkoulz hag en iliz.

V. S.

Imprimatur :

QUIMPER, 4 MAI 1959

V. FAVÉ

Ev. aux.



(1) Nom breton du pays de Galles (Angleterre).